


4 foent diwar an notenn a vo lakaet d'ar skritur ha d'ar c'hempennañ  
Difennet eo ober gant ur jederez elektronek

**Iodenn gentañ : Geografiezh (18 poent)**

**Studi an dielloù : ar cheñchamantoù bras en industriezh ar Frañs**

**Goulennoù war an diell 1**

1. Peseurt lodenn eus ar Frañs a zo ar muiañ a industriezh enni ?  
Pere eo an 2 b-pol pennañ eus industriezh ar Frañs ? (2 boent)
2. Pere eo an 3 ahel industriiel ?  
Kemerit harp war ur skouer bennak dibabet ganeoc'h, ha roit unan eus an abegoù a zo pennañ da startijenn an industriezh eno. (3 foent)
3. Pere eo an 2 dakad pennañ a zo industriezh enne abaoe pell ? Perak e vez lavaret ema an dakad-se o cheñch micher pe mod labourat ? (3 foent)
4. Termenit ar ger « teknopol ».  
Pelec'h emañ an teknopoloù pouezusañ ? Petra zo kaoz ? (3 foent)




Cheñchamantoù bras an industriezh er Frañs

SUJET ACADEMIQUE		EXAMEN : DIPLOME NATIONAL DU BREVET		SPECIALITE : SERIE COLLEGE	
SESSION 1998	SUJET Normal	EPREUVE : HISTOIRE-GEOGRAPHIE			
Durée : 2h00	Coefficient : 2		Code sujet : 19984		Page : 1/4

## Goulennoù war an diell 2

1. Peseurt mod diell eo houmañ ?  
Evit piv eo bet graet da gentañ-penn ? (2 boent)
2. Displegit petra 'dalv an dro-lavar islinennet « *Immense bouillonnement de matière grise* » (= « dispak ijin forzh pegement ») (2 boent)
3. Da beseurt rubrik eus ar gartenn e kas ar bomm-lavar « *un dynamisme exceptionnel, un immense bouillonnement de matière grise* » (= « startijenn hep par, dispak ijin forzh pegement » ?) (1 poent)
4. Peseurt traoù zo kaoz m'emañ al lañs gant kêr Roazhon ? (1 poent)
5. Ar skritell-mañ zo bet graet evit brudañ Roazhon. Diskouezit penaos. (1 poent)

# ***L'attraction rennaise***





**RENNES, première ville au pamarès de l'Entreprise\*,  
pour la deuxième année consécutive.**

Voilà qui confirme, s'il en était besoin, la loi de l'attraction rennaise. Une loi que les chefs d'entreprises et les cadres, installés à Rennes ses dernières années connaissent bien.  
Une loi à laquelle ils se sont soumis volontiers.  
L'attraction rennaise, on n'y résiste pas.  
Elle est faite à la fois d'une grande qualité de vie, d'un dynamisme économique exceptionnel, d'un immense bouillonnement de matière grise...  
L'attraction rennaise, on n'y résiste d'autant moins que la vie culturelle y est aussi intense que variée, que la mer est vraiment toute proche, que la convivialité est une des vertus que les Rennais cultivent le plus.  
Demandez donc à tous ceux qui s'y sont installés, ils vous le diront : voilà une attraction qui a bien des attraits

**Rennes, vivre en intelligence.**

\*Journal économique



## **Goulennoù war ar c'hentelioù : dibabit unan eus ar sujedoù kinniget**

### **Sujed 1 : an Unvaniezh Soviedel eus 1928 betek 1941**

Da stagañ ganti, lavarit berr-ha-berr e peseurt stad e oa politikerezh hag ekonomiezh an Unvaniezh Soviedel e 1928.

E-barzh al lodenn gentañ, diskouezit ar cheñchamantoù c'hoarvezet etre 1928 ha 1941, koulz en ekonomiezh hag er gevredigezh.

En eil lodenn, diskouezit penaos ez eus en em ziazezet ur gouarnamant hollveliek (pe : totalitaer).

Da glozañ, lavarit perak eo bet lakaet ar mare-se da « b-prantad staliniat ».

### **Sujed 2 : Rezistañs ha kenlabour e Bro-C'hall eus 1940 betek 1944**

Da stagañ ganti, lavarit berr-ha-berr penaos e oa rannet ar Frañs goude miz mezheven 1940.

Neuze 'vo dav deoc'h diskouez :

1/ peseurt stummoù a oa d'ar c'henlabour gant an Alamagn ;

2/ penaos ez eus bet stourmet ouzh an Alamagn, en diabarzh koulz hag en diavaez d'ar vro.

Da glozañ, menegit un darvoud c'hoarvezet nevezik zo, hag a zegas soñj deoc'h eus ar prantad-se 'tre 1940 ha 1944.

### **Sujed 3 : ar Frañs hag an trevadennoù o tispartiañ (1945-1962)**

Da stagañ ganti, diskouezit pegen bras oa impalaeriezh ar Frañs e 1945.

Neuze pledit gant an daou graf-mañ :

- penaos, e stumm pe stumm, eo aet ar frankiz gant an trevadennoù ?

- penaos eo bet levezonet buhez politikel ar Frañs gant kement-se ?